




KENVREURIEZ AR BREZONEG

KAIEROU KENVREURIEZ AR BREZONEG.

Naved Bloavez.

Niverenn 49. Taolenn:

1- OVERENNOU

Evid ar peoh hag ar justis

p.1

Santez Bernadeta, Gwerhez.

p.6

Sant Herve

p.9

2-E skeud ha war roudou Dom-Mikael an Nobletz:

An Tad Quintin

p.11

3-Kantik Sant Fransez a Asiz.

p.13

4-Kanou santel diwar ar Skritur Zakr,
gand V. Seité.

p.14

Mignoned ha lennerien ker....

Gand an niverenn-mañ (49) eh echu ho koumanant da "Gaierou
Kenvreuriez ar Brezoneg".

Fiziañs on-eus e kendalhoh evel araog da zigas deom ho skoazell
hag ho sikour.

Staga raim goudeze gand eur rummad nevez a bemp niverenn hag ho
pedi a reom da renevezi ho koumanant (25 F), evid ma vo ar brezo-
neg en e renk hag en e blas ive el liderez a hirio.

Bennoz ~~X~~ ha trugarez deoh.

Kenvreuriez ar Brezoneg. J.S

Evid kement tra a zell ouz "Kenvreurezh ar Brezoneg"
koum. 25 lur); her goulenn digand:

An Aotrou Job SEITE, Skol an Aod, 29249 GUISSNEY

CCP 1738 -66 RENNES

Kavoud a reoh azaleg bremañ:

1-Levr Overenn	35 lur
2)Komz Doue en Overenn, levr T	30 lur
3-Komz Doue en overenn, levr A,B,C pebhini	20 lur
4-Ar briedelez	8 lur
5-An Nouenn	8 lur
6-Cantiques du Diocèse de Quimper et de léon...	35 lur
7-Kroñziou Keltieg (Bleun Brug)	3 lur
8-Oveennou evid an Anaon	8 lur
9-Overennou en enor d'ar Werhez	8 lur
10-Sakramant ar Vadiziant	8 lur
11-Enoc'h Arden	8 lur
12-Overennou en enor d'ar zent ha d'ar zentezed.	10 lur.

+ Mizou kas,

*Troidigeziou aotreet da arnod evid an eskobti a-berz an
Aotrou F. BARBU, eskob Kemper ha Leon.*

Kemper, d'an 10 a viz mae 1978

Viaant FAVE.

oooooooooooooooooooo

II-EVID AR PEOH HAG AR JUSTIS (1)

(a heller lavared da geñver deiz bloaz ar sav-brezell, 11 a viz du.)

Kan an digor: (Sir. 36/18-19)

*Roit ar peoh, Aotrou, d'an dud a zo ouz ho kortoz,
Selaout ouz pedennou ho servicherien
ha bleinit ahanom war hent ar justis.*

Pedenn d'an digor:

*Aotrou Doue, c'hwi hag ho-peus roet da houzoud
e vefe arwet an dud a beoh ho pugale,
plijet ganeoh ni ho ped,
e teufem da ziazeza heb ehan ar justis
ha n'eus nemeti a gement a hellfe beza kred
euz eur peoh divrall ha gwirion.*

*Dre or Zalver Jezuz Krist, ho Mab hag on Aotrou
Doue beo ganeoh ha gand ar Spered Glan,
a oll viskoaz da virviken. Amen.*

pe: *Aotrou Doue, krouer ar bed,
a ren ar hantvejou hervez ho polontez
selaout gand trugarez ouz or pedennou
ha plijet ganeoh rei ar peoh d'on amzer
ma veulin heb ehan ho madelez.*

Dre or Zalver...

War ar provou:

*Aotrou Doue, sakrifis a zilvidigez ho mab, roue ar peoh,
a vez kinniget dindan spesou a verk peoh hag unvaniez,
grit, ni ho ped, ma tevio da startaad ar peoh etre hoh oll bugale.*

Dre Jezuz Krist, or Zalver. Amen.

Antivonenn d'ar gomunion: (Maez 5/9)

*Eüruz ar re a labour evid ar peoh.
rak anvet e vezint bugale da Zoue.*

pe(Yann 14/27):

*Ar peoh a lezañ ganeoh,
va feoh a roan deoh.*

Goude ar gomunion:

*Roit deom gand largentez, ni ho ped Aotrou Doue
Ar Spered a garantez;
evid ma teuin, maget gand korv ha gwad ho mab unganet,
da lakaad da greski dre ar bed etre an oll dud
ar peoh e-neus lezet ganeom.
Dre Jezuz Krist or Zalver. Amen.*

LENNADENN GENTA: Iz. 9/1-7

Lennadenn euz levr ar profed Izaiaz:

Gweled levr T. p.4

Salm 121/ 1-2;3-4,8-9.

Diskan; (Sir 36/18)

*Roit ho peoh Aotrou Doue
d'an dud a zo ouz ho hortoz.*

- 1-Stad a oa ennom pa 'z eus bet lavaret deom:
deom da di an Aotrou Doue
- 2-Ha setu ni chomet a zav
dirag da zoriou Jeruzalem.
- 3-Jeruzalem, savet evel eur gêr
unanet stard enni an tiez,
di e pign ar meuriadou
- 4-meuriadou an Aotrou Doue
- 8-Dre garantez evid va breudeur, va mignoned
e houlennom evidout ar peoh
- 9-Dre garantez evid ti an Aotrou Doue
e houlennom evidout levenez.

Izaiaz 32/15-20:

Frouez ar justis a vo ar peoh.

Lennadenn euz levr ar profed Izaiaz:

- 15-Ken na-vo skuillet warnom eur spered euz an nêh.
ken na zeuy ar goueleh da drei e gwezenneg
eur wezenneg dezi doare eur hoad.
- 16-Er goueleh e vleunio ar justis
hag ar justis a ray heh annez er wezenneg !
- 17-Ar peoh a vo frouez ar justis
Diwar ar justis e savo ar peoh
hag an dienkrez evid atao.
- 18-Va fobl a vo o chom en eul leh a beoh
eun demeuransou asur, eun demeuransou sioul.
- 19-Med ar hoad a vo distrujet gand ar hazard
hag ar gêr a vo izelleet don.
- 20-Eüruz e vezoh oh hada tost d'an dour
hag o lezel dinask an ejenn hag an azenn.

SALM 84/ 9ab,-10, 11-12, 13-14:

Ar pezh a lavar Doue eo ar peoh.

(Gweled levr A. p.90)

Izaiaz 57/ 15-19:

Peoh ! Peoh ! d'an neb a zo pell ha d'an neb a zo tost.

Lennadenn euz levr ar profed Izaiaz:

15-Evel-hen e komz an uhel meurbed
*an hini a zo anezañ a viskoaz da virviken
 hag a zo santel e ano.
 Chom a ran en eul leh tost d'an den gwasket ha repuet
 evid rei buez da spered an dud repuet
 rei buez da galon an dud glaharet.*

16-Rak ne fell ket din tamall heb ehan
*na maga fulor dalkmad,
 rak e kollfe nerz
 ar sperejou hag an eneoù-am-eus-krouet.*

17-En abeg d'e laeronsi fallagr, ez on fuloret
*hag em-eus skoet gantañ
 en eur drei va fenn, fuloret e oan,
 Monia ree (va fobl) dizuj gand hent e youlou.*

18-Gwelet am-eus heh henchou
*he farea a rin koulskoude,
 me a vo e bleiner
 hag e roin dezi endro va frealzidigez
 dezi ha d'he zud e kañv.*

19-An hini a laka da darza ar veuleudi war ar muzellou
*a lavar: " Peoh d'an neb a zo tost ha d'an neb a zo pell."
 hag e barea a rin.*

SALM:..... Unan euz an daou a zo araog.

oooooooooooo

EIL LENNADENN:1-Filip 4/6-9:

Ganeoh e vo peoh Doue.

Lennadenn euz lizer Sant Paol da gristenien kêr Filip:

(Gweled kaier 23 p. 189)

2-Kol.3/12-15:

Peoh or Zalver da ren en ho kalonou.

Lennadenn euz lizer Sant Paol da gristenien Kolos:

(Gweled levr T; p;12-)

3-Jak. 3/16-4/3:

Da heul ar wir furnez buez vad ha peoh.

Lennadenn euz lizer Sant Jakez: (Gweled levr B.p.92)

AN AVIEL.1-Maze 5/1-12:*Alleluia Alleluia*

(Maze 5/1)

*Eñruz ar re a labour evid ar peoh
rag anvet e vezint bugale da Zoue.*Aviel Jezuz Krist hervez Sant Vaze:

(Gweled Levr T.p.115)

Maze 5/38-48:*Alleluia Alleluia*

(Maze 5/9)

*Eñruz ar re a labour evid ar peoh
rak anvet e vezint bugale da Zoue. Alleluia*Aviel Jezuz Krist hervez Sant Vaze:*Jezuz a lavare d'e ziskibier bodet en-dro dezañ:*

38--"Gouzoud a rit e veze lavaret:

*lagad evid lagad; dant evid dant,*39-- *Med ! me 'lavar deoh: ne enebi ket ouz an den fallagr
er hontrol, tro da jod kleiz ouz an hini
a sko ganit war da jod deou.*40--Ma fell dezañ ober proses dit evid kaoud da zae,
*lez gantan ivez da vantell.*41--Ma teu unan bennak da ober dit mond gantañ epad eun hanter leo,
*chom gantañ epad eul leo penn da benn.*42--Ro n'an neb a houlenn;
*na dro ket kein d'an hini a houlenn diganit presta dezañ.*43--Klevet ho-peus e veze lavaret:
*karit ho nesa ha kasait hoh enebour;*44--Mad, me 'lavar deoh: karit hoh enebourien;
*ha pedit evid ar re ho-peus da houzañv ganto,*45--Evid beza evelse gwir vugale d'ho Tad a zo en neñv,
*eñ hag a ra d'an heol para
war an dud fall koulz ha war ar re vad,
ha d'ar glao koueza war an dud 'zo santel
koulz ha war ar re n'int ket.*46--M'ho-peus karantez evid ar re ho kar,
*peseurt digoll a hellfeh da hortoz ?
daoust hag ar publikaned o-unan ne reont ket kement all ?*47--Ma ne zaludit nemed ho preudeur
*petra a zisheñvel a rit ?
Ar bayaned zoken a ra kement all.*

48--Ra vo peurvad ho madelez, evel m'ao peurvad ho Tad a zo en neñv

3-Yann 14/ 23-29:

Alleluia Alleluia
Ar peoh a lezañ deoh
va feoh a roan deoh, eme or Zalver .Alleluia.

Yann 14/27

Lennadenn euz aviel Jezuz Krist hervez Sant Yann/

(Gweled Levr C.p. 38)

4-Yann 20/19-23:

Alleluia !Alleluia !
Ar peoh a lezañ ganeoh,
Va feoh a roan deoh, eme an Aotrou. Alleluia.!

Yann 14/27

Aviel Jezuz Krist hervez Sant Yann:

(Gweled levr T.p.78)

5-Maze 5/20-24:

Gweled levr A.p. 67

6-Yann 15/9-12:

Gweled levr B. p.38

oooooooooooooooooooo

18 C'HWEVRER SANTEZ BERNADETA, GWERHEZ.

Kan an digor: Salm 44/13-16

Ar re vrasa euz ar bobl a glask beza deuet mad dit. War he lerh
ar gwerhezed a zo ambrouget beteg ar roue. He hompagnunezed a zo
kaset dirazi gand joa ha levenez. Euz va halon e tarz eur han a
joa, d'ar roue e kinnigan va hanenn.

Aotrou, on Doue,
c'hwil hag a zo mignon ha gwarez an dud izel,
roet ho-peus d'ho servichere Maria Bernadeta
al levenez da weled ar werhez dinamm ha da gomz ganti,
roit deom ar hras da greski er feiz war an douar,
gand eur galon izel, evid ma hellim eun devez hoh arvesti en neñv.
DRé Jezuz Krist ho Mab hag or Zalver. Amen !

Lennadenn genta (Iza. 55/1-3,6-9)

Bezed ho skouarn war evez, deuit davedon.

Lennadenn euz levr ar profed Izaiaz;

- 1-Setu amañ petra 'lavar an Aotrou:
c'hwil oll hag ho-peus sehed deuit david dour,
ha goude n'ho-pefe ket a arhant,
deuit, prena hag evit,
deuit, prena heb arhant hag heb paea, gwin ha lêz.
- 2-Perag dispign arhant gand ar pezh n'eo ket bara,
ha dispign ho kobr gand ar pezh ne dorr ket an naon.
Selaquit ahanon ha debrit traou mad,
grit chervad gand meuziou euz ar re wella.
- 3-Bezed ho skouarn war evez, deuit davedon,
selaquit, hag e vo beo hoh ene.
Ober a rin ganeoh eun emgleo peurbaduz,
o rei deoh ar grasou promettet da Zavid.
- 6-Bezid war glask euz an Aotrou,
endra ma vo tu d'e gavoud
en em erbedid outañ, e keid ha m'emañ tost deoh
- 7-Ra droio an den fall diwar e hent,
hag a n den fallagr diwar e venosiou,
ra zistroio da gavoud an aotrou, e-no truez outañ
da gavoud Doue, rag mad eo da bardoni.
- 8-Hag ho soñjou n'int ket va soñjou
ha va heñchou din n'int ket ho heñchou, eme an Aotrou.
- 9-Kement ha m'ema an neñv a-us d'an douar,
evelse ema va heñchou a-us d'ho re,
ha va menozioù a-us d'ho menozioù.

Diskan:

C'hoant 'neus ahanoh ar roue
rag ho kened a blij dezañ.

11-Selaouit ,merh, ha sellit mad
ha lakit digor ho tiskouarn;
en eur vond kuit, lezit ar zoñj
euz tud ho pobl ha ti ho tad.

14-En he haerra, setu o ton
'barz ar palez merh ar roue
gwisket ganti dilhad neud aour
ha flahed enor 'zo d'he heul.

12-C'hoant 'neus ahanoh ar roue,
Rag ho kened a blij dezañ:
Bremañ, pa'z eo Aotrou warnoh
it 'ta da stoui dirazañ.

16-Kaset eo tre e-barz an ti
e-kreiz ar joa, ar veuleudi
Hi 'vo rouanez da viken
E palez kaer 'n Aotrou Dñe.

oooooooooooooooooooo

Alleluia, Alleluia !
He gwelet an-eus, koant evel ar goulm
e-touez ar gwez roz e bleuñ ha lili ar stankennoù.
Deuit c'hwil dibabet ganin
ennoh e rin va annez, c'hoant 'neus ahanoh ar Roue
rag ho kened a blij dezañ. Alleluia !

SANT VAZE 13/ 44-52.

AVIEL Jezuz Krist hervez Sant Vaze:

44-Jezuz a gomzas evelhenn d'an dud
-heñvel eo, emezañ, rouantelez an neñvou
euz eun teñzor bet kuzet en eur park,
ha kavet gand eun dén;
e guzad a ra en-dro ha gand e levenez,
ez a da werza kement e-neus hag e pren ar park.

45-Heñvel eo c'hoaz rouantelez an neñvou ouz eur marhadour
o klask perlez kaer,

46-Kavet gantañ eur berlezenn a dalvoudegez vraz
ez a da werza kement e-neus hag e pren anezi.

47-Heñvel eo c'hoaz rouantelez an neñvou
ouz eur roued taolet er mor,
hag a zeu gantañ pesked a beb seurt.

48-Pa vez leun, ar besketerien a jach anezañ war an aod,
hag eh azezont da zastum ar re vad e panerou
ha da deuler kuit ar re fall.

49-Evelse e c'hoarvezo da fin ar bed;
an êlez a deuio hag a zibabo ar re fall a douez ar re vad

50-hag e taolint anezo e kreiz an tan,
eno e vezo daelou ha skrignadeg dent.

51-Ha komprenet ho-peus kement-se ?

-Ya, emezo.

52-Eñ a lavaras dezo:

-kement skrib deuet da veza diskibl
e rouantelez an neñvou
a zo heñvel ouz eur penn-tiegez,
hag a denn euz e deñzor traou nevez ha traou koz.

WAR AR PROVOU:

Grit din, Aotrou Doue,
kavoud en overenn-mañ ar feiz birvidig
ho-peus roet da zantez Bernadeta,
hi, hag a ouezas plijoud dech
hoh en em ginnig da veuleudi ho kloar.

DRE Jezuz Krist or Zalver. AMEN !

ANTIVONENN AR GOMUNION:

Bleuniit evel al lili ha lezit da vond ho frond
lakiit deliou koant d'ho ficha
kanit meuleudi an aotrou
ha bernigat anezañ evid e oberou.

GOUDE AR GOMUNION:

Kennerzet gand ho misteriou sakr
e teuom d'ho pedi, Aotrou Doue:
roit deom ar hras da veza nersuz a galon
evel Santez Bernadeta, evid tizoud evelse,
goude trubuilhou ar bed-mañ an eürusted peurbaduz.

Dre Jezuz Krist or Zalver. AMEN !

oooooooo

Ganet e Bro Leon, ha ganet dall, Hervé a resevas an urziou bian digand Sant Paol, eskob Kastell. Beva 'reas e Lanhouarne en eur manati savet gantañ. Eno e varvas wardro ar bloavez 566,

oooooooooooo

KAN AN DIGOR: (Justus ut palma florebit) Salm 91/13-14:

An den just a vleunio evel eur wezenn balmez,
evel eur wezenn sedrez euz al Liban e kresko
plantet e porziou an Aotrou e kresko e ti Doue.

PEDENN AN DIGOR:

Aotrou, on Doue, salver ha mirer ar re ho klask
laket ho-peus e kalon an abad Santel Hervé
ar c'hoant da zilezel ar bed evid kaoud ennoh repu,
grit deom, war e bedenn, tehed diouz ardou an droug-spered
ha klask netra all nemedoh, gand eur galon hlan.

Dre Jezuz Krist or Zalver, Dzae beo ganeoh ha gand ar Spered Glan,
a oll viskoaz da virviken. AMEN !

LENNADENN GENTA: I Kor. 4/9b-14

9b-Va breudeur, n'eo bet laket evel traou souezuz da weled
evid ar bed, an etez hag an dud.

10-Ni a zo diskiant ablamour d'ar Hrist
med c'hwi a zo fur er Hrist,
ni a zo dinerz, med c'hwi a zo kreñv,
c'hwi a zo enoret, ha ni disprijet.

11-Beteg an eur a vremañ e houzañvom
gand an naon, ar zehed; en noaz emaoñ,
gwall gaset om, skoet e vez ganeom,
n'on-eus na ti nag uz.

12-Labourad a reom gand on daouarn on-unan,
maloziou a daoler warnom
ha ne reom nemed benniga,
gwall gaset, e houzañvom.

13-Drougkomzet e vez diwar or penn,
hag e klaskom kennerza
deuet om da veza evel lastez ar bed,
repuachou an oll beteg bremañ.

14-N'eo ket evid ober mez deoh e skrivvan kement-mañ
med evid ho repren evel va bugale muia karet.

Alleluia Alleluia. Eñruz an den e-neus doujañs ouz Doue
e-neus plijadur o senti ouz e lezenn. Alleluia.

Diskan/ Eñruz an hini a garo Doue
euz e oll galon hag e oll ene. (bis)

pe: Jezuz pegen braz ve, plijadur an ene,
pa vez e gras Doue hag en e garante. (bis)

4-Sklerijenn evid an den just, e tarz en deñvalijenn,
trugarezuz, tener ha leal.

5-Eñruz an den a brüst a galon vad,
hag a ren e vuez gand onestiz.

6-An den just, morse ne gouezo,
miret e vo bepred ar zohj anezañ.

7-Ne-neus aon ebed rag ar heleier fall
harpa a ra e fiziañs war Doue.

8-Divrall e galon, n'e-neus aon rag netra
brokuz eo e keñver ar paour

9-E justis a zalh mad atao
gweled a ra o kreski e hloar hag e vrud.

Alleluia Alleluia Mz 5/6
Eñruz ar re o-deus naon ha sehed
euz justis Doue
rag o gwalh a vo roet dezo. Alleluia !

LUKAZ 12/32-34 AVIEL JEZUZ KRIST HERVEZ SANT LUKAZ:

32-Jezuz a lavar d'e ziskibien:
-n'ho-pet ket aon, va bandennadig deñved
rag plijet eo gand an Tad rei deoh ar rouantelez.

33-Gwerzit ho tarvez ha grit aluzenn gantañ,
grit evidoh yalhau ha n'eont ket da goll,
duhont en neñvou e-leh ma ne dosta ket al laer
ha ne vez ket ar preved o skriñna

34-E-leh m'ema ganeoh ho teñzor,
eno ivez e vo ho kalon.

WAR AR PROVOU:

Plijet ganeoh, Aotrou Doue, ober digemer vad
da brovadenn ho servicherien;
war bedenn Sant Hervé grit deom
chom heb prizoud re madou ar bed-mañ,
ha c'hoantaad stard ar madou peurbaduz.

Dre Jezuz Krist or Zalver. Aman !

KAN AR GOMUNION:

Me hen lavar deoh:
c'hwri hag ho-peus dilezet peb tra
evid dond d'am heul
a resevo kant evid unan,
hag ho-po ar vuez peurbaduz.

Mz 19/29

GOUDE AR GOMUNION:

Kennerzet ho-peus ahanom, Aotrou Doue, dre an overenn mañ;
p'emaom o houlenn gand pedenn Sant Hervé,
grit deom houlenn ar pezh a zo mad
hag obten evel-se ar pezh emaom o klask.
Dre Jezuz Krist or Zalver. AMEN !

E-SKEUD HA WAR ROUDOU DOM MIKAEL AN NOBLETZ: (Kendalh)

=====

AN TAD PER QUINTIN:

Pell om chomet da gomz euz kouent ar Yakobined e Montroulez, hag euz hini pe hini euz ar relijiused o-deus bevet er gouenn-se eur pennad euz o amzer.

Ha koulskoude e ve bet mad deom ivez komz euz and dud a reng uhel a zo bet deuet da ober o diskenn eno, tro pe dro, evel Anna dukez a Vreiz er bloavez 1505 d'ar mare ma oa ivez Rouanez Bro-Hall, hag eun tammig diwezatoh er bloavez 1548, Mari Stuart en hent da vond da Bariz goude beza douaret war aochou Rosko. Med tro on-devezo da gomz anezo pa gontim diwezatoh buez Charlez Bleiz duk a Vreiz ha neuze e vo ano ivez ganeom euz ar skrivagner yakobin: Albert Le Grand ginniig eñ ivez euz Montroulez.

Med mal braz eo deom komz euz an tad Quintin, e-neus grêt kement evid e urz hag evid ar misionou e Breiz. Roet e-neus eul lans nevez da zantelez ar veneh endro dezañ, ha den n'e-neus sikouret kement Dom Mikael en e visionou. Lod a lavare ez oa eñ teod Mikel, eñ a bræzege, Mikêl a rea katekiz.

Pêr Quintin a oa ganet e maner Kerozar e parrez Plouyann, a oa d'ar mare stag ouz eskobti Landreger. E dad, Lan Quintin, aotrou Kerozar a oa ivez Aotrou Limbahu e Sant-Tagoneg, e vamm Perrin a Germerchou a oa ginnidig marteze euz Garlan, marteze euz Lanneur.

N'ouzor ket mad awalh peur oa ganet Pêr. An Aotrou Renaud el levr e-neus skrivet, ar gwella a zo bet skrivet marteze diwarbenn Dom Mikel a lavar, e doug e levr, e oa ganet er bloavez 1563, med en daolenn a zo e dibenn e levr, e skriv e oa ganet er bloavez 1569. Gwir eo ar Gouvello a lavar ivez 1569. Setu perak beteg gweled ni ivez a zalho d'ar bloavez 1569. Ha diouz ar bloavez-se eo e klaskim renka peb tra en e vuez.

Evel Dom Mikel, evel meur a zant all euz e amzer, evel Sant Fransez a Zal, eo bet skolieta ez vianig gand eur beleg: an Ao. Miordeg eur beleg euz e familh ginnidig euz Montroulez.

Evel Dom Mikel ez eas da ober e studi a ziavez Breiz, da Bariz, henchet gand eur beleg all, an Ao. Lachiver a deuas diwezatoh da veza eskob Roazon. Kustum oa an dudjentil da ober evelse d'ar mare: eur beleg a yea da heul o bugale a oa war ar studi, er hêriou braz, hag a veille warno, n'eo ket hebken dre lorch, riskluz oa buez eun den yaouank oh ober e studi er hêriou braz, awechou e kollent o buez, alies oh c'hoaz o feiz, o buez kristen.

Evelse e welom ivez eur beleg, an Ao. Deage, o vond da heul Fransez a Zal deuet da ober e studi da Bariz.

Amzer studi Pêr Quintin a zo o vond da veza trohet e diou. N'eo ket bet êz morse d'eur studier, chom war ar studi, pa zav draill dre ar vro. Buan e sav c'hoant gantañ mond da gemered e lod er stourmajou. Setu ar pezh a erruas gand Pêr, pa zavas an duk Merkeur a-eneb Herri III e vreur kaer koulskoude. Krogou garo a oe neuze etre soudarded ar roue ha re Merkeur. Pêr a gemeras perz enno beteg an deiz ma oe sinet ar peoh e Naoned er bloavezh 1598. Da gredi eo e reas Pêr ar brezel evel ar zoudarded all na muioh na nebeutoh, na gwelloh na falloh... beteg an deiz ma teuas ennañ e-unan; kaoud a reas dezañ, eun nozvez, beza klevet eur vouez o lavared dezañ, evel da Aogustin gwechall: "tolle, lege"; kemer ha lenn, hag al levr a gouezas etre e zaouarn a oa end-eün "kovesion" Sant Aogustin. Pêr a jeñchas buez, hag er bloavezh-se, hag eñ soudard c'hoaz, e yunas epad an Azvent hag ar horaiz.

Dispega a reas kenta ma hellas euz al la, evid distrei a nevez war ar studi. Kemered a reas hent Bourdel. Dre ar mor eo ez eas di, evel m'e-noa grêt daou pe dri bloaz araok Dom Mikael e-unan. Moarvad, an henchou war zouar a oa diez, hag hed an hent e veze meur a droh-yalh. Ar zoudarded chomet dilabour abaoe m'oa bet sinet ar peoh, n'o-doa ket oll, pell ahano, grêt evel ouz Pêr, bandennou a oa c'hoaz anezo, ha n'oa ket brao koueza etre o daouarn. E Montroulez eo e kemeras ar vag evid mond da Vourdel eur vag a genwerz a yea hag a deue etre Bourdel ha Montroulez.

Nav bloaz oa chomet on den santel da vrezelekaad. E nav bloaz ar spered a hell mergli. Hag ouzpenn'se, lod a lavar oa deuet Pêr epad e amzer zoudard da veza troet da eva, Kredi a heller n'eo ket bet eun dra êz dezañ kreñi a nevez gand e studi ha beza hervez an Aviel. Med dibuz a lavarer, buan awalh en-devoe an treh, dre hras Doue, a dra zur, med ivez gand sikour Mikêl.

Er bloavezh 1599, e kavom anezañ e Ajen. Eno ha neuze oe e oe skoulmet etrezañ ha Mikêl eur garantez hag a jomo birvidig beteg fin o buez. Daou studier Breizad e oant hag a glaske dreist oll sikour an eil gand egile evid en em zantellaad? N'ea ket gwelloh kalon eged hini Pêr. Eur gernez spontuz, evel ma veze gweled awechou d'ar mare, a zirollas war ar vro, Pêr ne jomas ket da neñi. Eun dro vuan a reas e Breiz gwerza a reas e beadra hag an arhant e skouras kalz studierien baour.

Med n'oa ket awalh c'hoaz, bremañ Pêr n'eo ket bale eo rea war hent ar zantelez, reded eo a rea. E skol edo gand an tadou jesuisted ha c'hoant a deuas dezañ beza relijius evel do, hag ez eas da houlenñ dor-zigor en o houenn e Toulouz. Ne jomas ket pell eno, pevar pe bemp miz marteze. Eur pennad a oa, diouz a lavar lod, n'edo ket Pêr war e du, hag e oe kentelliet dezañ mond da gemered êr ar vro. Lod all a lavar e oe kentelliet dezañ dond da Vreiz ablamour ma ouie brezoneg hag ar vrezonegerien a oa diouer braz anezo d'ar mare e Breiz dreist-oll e-touez ar veleien. Hag aze marteze e heller gweled dorn Mikêl e guzulier, eñ hag e-neus ken añes goulennet digand ar veleien komz ha prezeg e brezoneg. (da gendelher)

KANTIK SANT FRANSEZ A ASIZ.

War don ar hantik savet gand M. Skouarneg; "Seigneur, fais de nous des ouvriers de paix."

Diskan/ *Hon Tad, grit ouzom servicherien ar peoh.
Grit deom rei d'ar bed tomnder ho karantez.*

1-Pa verv houero ar gasoni
Ra zigasim ar garantez.
Pa deu warnom an dismegañs,
Ra baro douster or pardon.

2-El leh ma tarz an disparti (pe: a, n drougiez)
Ra vim skoulm an unvaniez;
Pa vez trellet ar sperejou
Ra lakim splann ar wirionez.

3-Pa gouez noz an deñvalijenn,
Ra lugerno or sklerijenn.
E-kreiz an dristidigez,
Ra zavo kan ol levenez.

4-An den brallet en e arvar
Ra gavo harp e nerz or feiz.
War hent garo an dizesper,
Ra zougo frouez on esperañs.

5-Kent eget beza dizoaniet
Ra glaskim rei frealzidigez.
Hep gortoz beza komprenet
Ra vim ato prest da gompren.

6-Rak an neb a vevo brokus
E gerhenn vo karget leun-barr.
En em goll evid an nesa
Eo gwir hent ar zilvidigez.

7-Ret eo deski da bardoni
Evid digemer ar pardon.
Ret eo kaout skiant ar maro,
Da vont d'ar vuez peurbaduz.

oooooooooooo

D'ar 4 a viz here 1976. F. Falc'hun. Daoulas)

KANTIK IZAIAS.

C'hwi, e gwirionez, 'zo eun Doue kuzet,
Doue Israel, Salver benniget

Dinerzet e-neus, ha karget a véz,
Ar re a glaske diskar e halloud.

Tehet int dic'han, izel o 'fennou,
E enebourien, gand o idolou.

Israel e-neus salvet da viken,
Chom a ray atao evid on difenn.

Evel-se e komz, on Doue dispar:
En eo Krouer-Meur an Neñv, an douar.

An douar gantañ 'zo greet 'vid an dén,
Ha kement a zo e grouadurien.

Doue all e-béd ne hell ket beza.
Rag on Aotrou 'zo ar mestr war bep tra.

Komzet e-neus bet hag a-wél d'an oll.
En a oar lakaad pep tra en e roll.

"Me eo, emezañ, an Doue lea.
Evid ar re oll a vo din feal.

D'an Tad ha d'ar Mab, d'ar Spered Santel,
Bennoz meuleudi, ha gloar eternal.

A hell beza kanet war eun ton Gousperou.
pe: "Eüruz an hini".

KANTIK DAVID.

Doue Israel, on Tad, on Aotrou,
C'hwi 'zo benniget en oll gantvejou.

Warnoh pep galloud; warnoh pep kaerder.
Dreist pep tra ema ho kloar ho splannder.

Deoh-C'hwi eo hepkén an Neñv, an douar,
Dreist an oll briñsed C'hwi a zo dispar.

Deoh-c'hwi an enor, ar birwidigez,
Ho kalloud a rén ar béd oll a-béz.

En ho torn ema an nerz, ar halloud,
Hag hepdoh ne hellfe padoud.

Rag-se, Aotrou, ni veul hoh ano,
Hirio evel deh, da viken, atao.

A hell beza kanet war eun ton "Gousperou"
pe: "Eüruz an hini."

Mestr ar Béd a-béz, truez evidom !
Lakit ho toujañs da goueza warnom.

Savit sonn ho torn e-neb an estren,
Evid ma welint ho kalloud divent.

'Vel m'ho-peus drezom skedet santelez,
Diskouezit d'ezc ho nerz deom ivez.

Dezo da anzav evel ma reom-ni,
N'eus Doue e-béd, nanç, nemedoh-C'hwi.

Diskouezit d'an oll, dre ho purzudou,
N'eus galloud e-béd dreistoh-C'hwi, Aotrou.

Grit ma tigouezo buan, an amzer,
Ma vo embannet ho purzudou kaer.

Torrit o 'fennou d'hoh enebourien,
A garfe beza war ar béd o rén.

D'hoh enebourien ho sell 'zo luhed:
Ra gouezint warno ma vint pull-het.

Bugale Jakob, o lodit, Aotrou,
Ha rentit dezo herez o zadou.

Kemerit truez, Aotrou, Ni ho péd,
Ouz Bro-Israel, ho kenta ganet.

Ouz Jeruzalem, bezit c'hoaz truez,
Hi ho kêr zantel ha leh ho palez.

Ha kargit Sion euz ho splannderiou,
Ha ra vo ho templ leun a enoriou.

d'an Tad ha d'ar Mab, d'ar Spered Santel;
Enor, meuleudi ha gloar eternal.

War Ton ar Gousperou

pe: "Eüruz an hini."

GOUEL AR GONVESORED.

ESKIBIEN.

ISTE CONFESSOR.

War ton koz: Iste Confessor.

Ar hovesour-mañ, gand poblou an douar,
A zo enoret evid e vertusioù.
Hirio eo savet, ô eursted dispar !
Da hloar an Neñvou.

Karantez Jezuz, a zavas e galon,
Sentuz eo chomet ouz Lezennou Doue.
Aketuz bemdez da ober orezon,
Glan korv hag ene.

Leun a veritou, braz eo bet e halloud.
Rei a ra ive, d'ar re glañv ar pare.
Goul'ennom gantañ, santelez da helloud
Salvi on ene.

Salud hag enor, héd an Eternite,
D'an Tad ha d'ar Mab, ha d'ar Spered Santel,
Treinded verniget, Tri Ferson e Doue:
Deoh gloar eternal.

AMEN.

Sizun ar Basion.

Lourd 1964.

V.Seite.

Hervez levr overenn An Ao.Chaloni Uguen.

P'HO KALVAN.

Ph'ho kalvan e teuit,
 Va Doue, va Barner,
 Va anken a vougit
 Hag e vezan seder.

Ha c'hwi, ô tud digar,
 Beteg peur e chomoh
 Ken dall ha ken bouzar,
 Ar gaou o rén warnoh ?

Klevit ar wirionez;
 Doue, d'an dén e gar,
 N'eo nemed karantez,
 Karantez heb he 'far.

Tehit diouz ar pehed.
 E peoh, soñjit er-vad,
 Ha kinniguit profou
 Da Zoue, ho kwir Dad.

An du-se a lavar:
 Piou a roio d'an dén
 An eürusted hep par ?
 C'hwi, Aotrou, C'hwi hepkén.

Doue a ro din-me
 Muioh a levenez
 Eged ma na rofe
 An oll binwidigez.

E peoh me 'ziskuizo,
 Va Doue, 'n ho kichenn.
 Rag piou em-bije aon?
 Ho kalloud 'zo divent.

A hell beza kanet war don Kantik "Ar Baradoz"
 pe eun ton all.

GALV DA VADELEZ DOUE.

Doue, en ho fulor,
Na skoit ket ho mab,
Distanit hoh imor
Ha bezit din eun tad.

Doue, bezit truez,
Emaon o tizeria.
Skoet eo va buez
Ne ran nemed krena.

Beteg pegeid, Aotrou,
E rankin ho kortoz ?
Klevit va hirvoudou.
Va skorit deiz ha noz.

Skviz on gand va daelou,
Ha klañv gand ar hlahar.
N'am lezit ket, Aotrou,
Pelloh 'kreiz an arvar.

Kasit pell-pell diouzin,
Haderien vil ar gaou.
Troit ho sell ouzin,
Ma vo fin d'am hlemmou.

Neuze, va enebour
A vezo leun a vez.
Ha me da virviken,
Ho meulo noz ha deiz.

A hell beza kanet war don: "Kantik ar Baradoz"
pe eun ton all.

BRASTER AR GROUADELEZ

Nag eo braz hoh ano,
 Doue, Krouer ar Béd.
 N'eus ha ne vo biken,
 Brasoh ano e-béd.

Kana 'rin, va Doue,
 Braster hoh oberou,
 Hag a zav uhelloh
 Eged lein an Neñvou.

Digand ar vugale,
 Ar re 'zo o tena,
 Eo e zav davedoh
 Ar veuleudi gaerra.

Pa zell an Neñvou,
 E bro gaer ar stered,
 Me 'wel hoh oberou,
 Eun dudi da weled.

Neuze, ô va Doue,
 Me en em gav bihan !
 Dirag ho majeste
 Petra on ?.... Amprevan.

C'hwî ho-peus koulskoude
 Va laket, paour kêz dén,
 Da rén, evel roue,
 War ho krouadurien.

A hell beza kanet war don kantik ar Baradoz
 pe eun ton all.

EVID TRUGAREKAAD.

Ho meuli 'rin, Aotrou,
Euz a greiz va halon;
Rag par d'hoh oberou
N'eus netra evidon.

Kana 'rin hoh ano,
C'hwri an Oll-Halloudeg.
Tridal a rin atao.
Dirag ar béd krouet.

N'am bezo aon e-béd
Ouz va enebourien.
Ganeoh e vin bepred,
Treh d'an oll waskerien.

C'hwri 'viro va gwiriou,
Eneb an displeal.
Rag C'hwri 'zo evidon
Eur gwir varner leal.

Galloudou ar re 'fall
'Zo echu evid atao.
Er béd-mañ, er béd all,
N'o-deus mui a ano.

On Daue-ni, a-vad,
A reno da viken.
Kanom oll eta tud vad
E halloud da viken.

A hell beza kanet war don Kantik ar B aradoz.
pe eun ton all.

AR PASTOR MAD.

Doue eo va 'Fastor,
Ne vanko din netra.
Rag war ar peuri druz
Am has da ziskuiza.

War lez an douriou sioul,
E torr naon va ene.
Va has a ra d'e heul
War hent e garante.

Hag e rankjen treuzi
Traoñienn zu ar maro,
Aon e-béd n'am-bije,
Ganin e vo atao.

Ho paz a vezo din,
Eun harp euz ar gwella,
Ho kammel am reno
Dre an henchou surra.

C'hwil 'zavo evidon,
Eun daol, warni pep tra,
C'hwil 'lako war va ' fenn
Eoul fronduz an dousa.

Gras kaer an eürusted,
A leunio va bue,
Da hortoz mond eun deiz
Da jom da di Doue.

A vez kanet war eun ton nevez bet savet gand
an Aotrou Abjean (Montroulez)

JOA HA PARDON.

Eüruz eo an hini
E-neus kavet pardon,
An hini n'ez eus mui
Pehed en e galon.

Eüruz an dén a zo
Dibeh dirag Doue,
An dén a vev atao
E gras e garantez.

Pa jomen pell diouzh,
Me 'hervoude bemdez.
Va eskern dizeket
O-doa liou ar gernez.

Noz-deiz me a zante
Ho torn ponner warnon,
Va zeod a zizehe
'Vel dindan an heol tomm.

Neuze, em-eus ouzoh,
Anzavet va 'fehed.
Lavaret em-eus deoh:
Pardon ô Tad Karet.

Doue, C'hwil 'ro deom-ni,
Da heul gras ar pardon,
Levenez ha dudi,
Hag eürusted gwirion.

A hell beza kanet war don "Ar Baradoz"
pe eun ton all.

Hervez ar SALM 109.

An Aotrou e-neus laret d'an Aotrou,
Azezit, va Mab, a zeou d'am galloud.

Ha dindan ho treid, hoh enebourien,
A vo evidoh, skabell da viken.

C'hwi eo ar Mestr braz war ar béd krouet,
Azaleg an deiz m'oh bet konsevet.

'Vel ma lavare Urz Melkisedek:
Bremañ, da viken, c'hwi a zo beleg.

Ya, c'hwi eo ar Mestr, dreistoh n'ez eus dén,
War ar Rouaned C'hwi a zo o rén.

Dindannoh peb bro a ranko plega:
Brasoh egedoh netra ne hell beza

Eva 'ra dour réd, en eur vond en hent,
Ha setu perag e sav sonn e benn.

D'an Tad ha d'ar Mab, d'ar Spered Santel,
Enor, meuleudi ha gloar eternal.

A hell beza kanet war eun ton gregorian,
pe eun ton: "Krampoez gwiniz"
pe c'hoaz: "Eüruz an hini."

Oll a wir galon, meulom an Aotrou,
Kaer eo ha dispar e oll oberou.

Ya, dispar meurbed oberou Doue,
O anaoud 'zo réd, talvouduz ive.

N'ez eus ket brasoh eged e labour,
Divent e justis, e galon 'zo aour.

Ar béd greet gantañ, pegen burzuduz !
Atao evidom 'vez trugarezuz.

D'ar re 'gréd ennañ, eñ a ro bara,
Derhel a ra soñj euz e bremsa .

On laket e-neus, ni oll, da herrez,
War e oll vadou, ar grouadelez.

Gwirion eo ha just, eün e Lezennou,
O na pegen kaer e oll gemennou.

Lezennou ken just a bad da viken,
Neb a zent outo ne varvo biken.

Kaset e-neus deom e zilvidigez,
Hervez e justis hag e zilvidigez.

E ano a zo kant mil gwech santel,
Dezañ karantez, doujañs eternal.

Fur braz eo ar re a ra evel-se,
D'an Neñv e ni jo eun deiz o ene.

D'an Tad ha d'ar Mab, d'ar Spered Santel
Enor, meuleudi ha gloar eternal.

A hell beza kanet war don:

"Eüruz an hini."

pe eun ton gousperou.

Hervez ar SALM 111.

Eüruz eo an dén a zoug da zoue,
A-héd e vuez, doujañs, karante.

E lignez, bepréd, a vo benniget
Gand an oll e vo, karet ha meulet.

Eürusted e-neus, ha pinvidigez,
War e dal e skéd, justis ha furnez.

Eur sklerijenn eo e-kreiz an noz-dall,
Kalon aour e-neus, buez didamall.

M'e-neus peadra, e ra vad d'ar paour.
E zorn a vez prest atao d'e zikour.

Gras Doue a zo d'an dén didamall,
Ha setu perag e chomo divrall.

Dirag poan ha droug, n'e-neus aon e-béd,
E fiziañs 'zo stard e Doue bepréd.

Hag e-kreiz ar béd, e galon 'jom kreñv
Rag e zell a zo paret war an Neñv.

Da viken e vo doujet e ano,
Hag e gloar an Neñv, eun deiz e vevo.

An dud villiget a skrigno o dent,
O weled e hloar e bro gaer ar Zent.

D'an Tad ha d'ar Mab, d'ar Spered Santel,
Enor, meuleudi ha gloar eternal.

A hell beza kanet war eun ton gousperou,
pe: "Eüruz an hinñ."

*Kanom mil bennoz d'an Doue Santel,
Rag e garantez a zo eternal.*

*A greiz va halon, va Doue, bennoz !
Va zelaou a rit, bemdez ha bep noz.*

*Ho meuli a ran gand an oll ehez.
Ha stouet izel, ho pedan bemdez.*

*Bennoz deoh, Aotrou, c'hwi 'zo karantez,
C'hwi, Doue fidel, eo ar wirionez.*

*C'hwi a oar kleved an dén dinerzet,
Ha kerkent ganeoh e vez kennerzet.*

*An douar a-béz, ar Zent, an Elez,
Ho meul da viken, atao, hep paouez.*

*Diwallet ganeoh, n'am-eus aon e-béd.
Dineh ha dispont e kerzin bepréd.*

*D'am difenn er-vad, ho kalloud warnon,
'Vel eur voger greñv a zo evidon.*

*Ganeoh, va Doue, me a vo Salvet,
Rag c'hwi, da bep dén 'zo eun Tad Karet.*

*D'an Tad ha d'ar Mab, d'ar Spered Santel,
Enor, meuleudi he gloar eternal.*

Da veza kanet war eun ton Gousperou,
pe "Eüruz an hini."

Hervez ar SALM 147.

O Jeruzalem, meulit an Aotrou,
Ha kanit dezañ, leiz ho kalonou.

Prennou kreñv 'n-eus greet evid ho toriou,
War ho pugale e skuill bennoziou.

War ho pro e lak ar peoh da bara.
Bemdez e ro deoh ar gwella bara.

Evel gloan e nij e erh 'uz d'ho penn.
Ha diouz ar beure hada 'ra reo gwenn.

'Vel bruzun bara, e hrizill e gouez.
Hag an dour a skorn dre halloud e hwéz.

Pa gar Eñ a ra d'an avel c'hweza,
Ha d'ar skorn teuzi, d'an arne tarza.

Da Jakob e-neus greet e bromesaou,
Ha da Israel e ro kemennaou.

N'e-neus bet biskoaz, ha ne raio ket
Kemend-all a vad da vro all e-béd.

D'an Tad ha d'ar Mab, d'ar Spered Santel,
Enor meuleudi ha gloar eternal.

A hell beza kanet war eun ton Gousperou
pe: "Eüruz an hini."

LUCIS CREATOR?.

Sulioù ordinal.

O Krouer-Meur ar Sklerijenn,
A verk amañ deizioù an dên,
Krouet ganeoh er penn kenta,
Araog m'ho-peus krouet pep tra.

Eur vintinvez gand abardaez
'Zo war hoh urz anvet dervéz.
Araog ma kouez warnom an noz,
Ni a oar deoh kas or bennoz.

'Vid ne vo ket deom on ene
Dalhet pell diouz ar gwir vue
Dre jom hep soñjal er bed all,
Ha klask heñken plijadur fall.

Ra gavim digor an Neñvou
Ma vo eñruz on eneoù.
Ra zilezim droug ar pehed,
Ma vim atao leun a yehed.

Or hlevit, Tad trugarezuz.
Or hlevit ô Salvez Jezuz.
Ha C'hwil ive, Spered Santel,
Euz palaz ho kloar eternal.

AMEN.

(Diwar levr-overenn an Ao. Uguen.)

A hell beza kanet war an ton latin, pe
eun ton kantig brezoneg.

CREATOR ALME.

Suliou an Asvent.

Krouer gallouduz ar stered,
Sklerijenn gaer an eneou,
O C'hwil, Jezuz, Salver ar Bed,
Selaout mad or pedennou.

Mirit n'ez ay ar bed da goll.
Pellait diouzom ar spered fall.
Mougit ennom or youlou foll
Ha dalhit deom or Feiz divrall.

Evid paea dle ar pehed
Ez oh ganet gand ar Werhez,
Osti dinamm, er Groaz savet,
Evid prena an denelez (l'humanité)

Dirag galloud ha gloar Mab-Dén,
O kleved embann e Ano,
An Neñv a drid, an diaoul a grén,
Hag ar bed-oll a stou ato.

Ni ho péd stard, ô Barner-Meur !
Kennerzit mad ho pugale,
Hag o mirit atao, beb eur,
Ouz an diaoulou korv hag ene.

Meuleudi deoh, enor ha gloar,
Doue, Tad, Mab, Spered Santel,
Dre ar Béd-oll, an heol, al loar,
Bennoz, bennoz d'an Eternel.

AMEN.

A ya mad war don: "Creator Alma siderunt"

Lourdes, da geñver Sizun ar Basion 1964.

JESU REDEMPTOR.

Nedeleg.

Jezuz, a beb eternite,
C'hwil 'zo atao Salver an Dén.
Mab da Zoue, Doue ive,
Ha da viken gantañ o rén.

Sklerijenn splann ha skéd an Tad,
C'hwil eo fiziañs an dud er bed.
Klevit bepred pedennou mad,
An dud er boan, an dud ho péd.

Dalhit soñj mad, Krouer karet,
Ho-peus kemeret furm an dén.
Evel-dom-ni oh bet ganet,
Euz eur vaouez, 'kreiz an noz yén.

An devez-mañ a ro bep bloaz
Soñj d'an oll dud oh diskennet,
Araog pignad ouz korv ho Krouz,
En eur hraou paour, 'mesk al loaned.

Endro d'ho kavell, an dud paour
A stou e-kreiz an noz ruz-tan.
E bro al loar, ar stered aour,
Uhel en Neñv, Elez a gan.

Hirio ive, ô Bugelig,
Leun or halon a garantez,
Ni a gan deoh meur a gantik:
Kantikau kaer on levenez.

Meuleudi deoh, Jezuz ganet,
Euz korv Mari, ar Werhez Hlan.
Ha meuleudi d'ho Tad karet,
Hag enor c'hoaz d'ar Spered Glan.

AMEN.

A hell beza kanet war don: "Jezu Redemptor"
(An ton koz)

Lourdes, da geñver Sizun ar Basion 1964.